

SON AR VATEZ VIHAN

WAR DON : *Margeidig ha Loëizig*

An ev-ned a ri-chan, an heol a zo laou-en
kae-rat eo ar me-ne gant e vleu-niou me-len, ô,
kae-rat eo ar me-ne gant e vleu-niou me-len!

An evned a richan, an heol a zo laouen;
Kaerat eo ar mene gant e vleuniou melen!...O! (Diou wech)

Brao eo d'ar mesaer c'hoari war ribl ar waz,
Ha d'an alc'houeder skanv tarnijal en oabl glaz;

Ha d'in, matez vihan, kas lein d'ar vederien,
'N eur ganan, dibreder a-hed ar wenojen.

Du-hont, er «Zouleg vras» 'man an dud oc'h êsti:
Ouz eul lommig jistr mat e c'hoarzo pep-hini.

Ma bec'h a zo pounner, mes ma zroad a zo skanv;
Frealzus eo poanial da zustum bara gouanv.

Ha penôz e c'hallfen klemm ha fall-galoni,
Pa na strink en-dro d'ia nemet c'hoarz ha dudi?

Mignoned diskiant a lar d'in a-wecho:
— «Perak, matez vihan, n'ez ket da vale bro?

«E Pariz ar vuhe a zo distur ha frank,
«Karget a levezet evit an dud yaouank.» —

— Miret, tudou fallakr, hoc'h aliou dibœll!
Pariz eo mor islonk matezig Breiz-Izel!

Ped anê, tec'het fur ha prizet gant an holl,
'Deus beuzet o enor 'n e gwagennou diroll!.....

Aman, e Breiz-Izel, gant poaniou ma diouvec'h,
Hep bezan pinvik bras, ma a vevo dinec'h.

Fe hag unvaniez, zoken er baourante,
'Zo gwell eget madou e diavêz Doue!

Aze, er «Zouleg vras», 'man ma gwella mignon,
Eur pôtr krenv e ziouvec'h ha leal e galon.

Me 'meus tost da gant skoued, ma Yannig en deus daou;
Pa deuy an neve-hanv 'vo diskleriet an traou....

Prenet e vo eur vioc'h ha savet eun ti plouz
Du-ze, 'tal ar feunteun, en draouiennig didrouz.

Eno, peñ diouz ar bed hag holl d'he c'harante,
Matezig Breiz-Izel a gano noz ha de!...O!

Kculmig Arvor.